

# Kantik Itron Varia Lazlaün

---

TON : *Ni holl hirie digant Doue.*

## DISKAN

Itron Varia Lazlaün,  
Silaouet o pugale,  
Ho ped stouet holl d'an daoulin  
D'o mirout hed o bue.

## POZ KENTA

Salud d'ac'h Mari rouanez  
Itron n'e deuz ket he far,  
Mamm dener leun a vadelez  
Evit nep en euz glac'har.

2

A viskoaz e oac'h dibabet  
Da veza Mamm da Jezuz,  
Eveltan nag ec'h euz poaniet  
Da lakat an dud eüruz !

3

O Mamm gallouduz deist an oll  
Reit d'imp an dorn da gerzat,  
Ma trec'htomp war ar bed diroll  
Ha ma plijfomp d'ac'h dalc'hmat.

4

Lec'hiou a zeblant dibabet  
Evit meuli Mamm Doue,  
Enne kav ar belerined  
Tenzoriou he c'harante.

5

Chapel Lazlaün zo brudet  
Dre ar burzudou dispar,  
Graet gant ar Verc'hez binniget  
E kenver an nep he c'har.

6

Gant an daou bardon. hed an de,  
Eno n'em gav war eun dro,  
Eleiz a Vreiziz leun a fe  
Deut euz pevar horn ar Vro.

7

Rum warlerc'h rum, e vent gwelet  
Hed ar c'haual, an hent braz.  
O tont o vont korf o roched.  
Tanet, blonset o zreid noaz.

8

Pelerined an Teir Gwerc'hez  
Bet mintin mat e Kleden,  
D'an ofern bred a zeu gant prez,  
Ha prim kercent da Rostren.

9

Nag an heol ru-tan o virvi,  
Nag a glao, nag an avel,  
N'halfe o c'harz dont da b' di  
Ar Vamm vat en he chapel.

10

Darn a zeu d'he zrugarekat  
Euz ar grasou kaer 'deuz bet,  
Darn all e c'houlen eur mennad ;  
Peurlies int silaouet.

11

Evidomp, tud e Paol ganet,  
Ni laro a vouez uhel,  
Kent evit mankout d'he c'haret  
E ve gwel ganimp mervel.

12

Dirak he skeuden vinniget  
E Lazlaün ni bedo,  
Pa vimp tentet pe glac'haret ,  
Gant fianz ni a gano.


---

---


# Eil Kantik Itron Varia Lazlaün

TON AR GAN : *Dieu de paix et d'amour.*

TON AN DISKAN



I-tron Va-ria Laz-la-ün, m'ho kar. me ho ka ro,



Keit e vin war an dou-ar, da vi-ken en En-vo.

POZ KENTA

Na piou a garfemp-ni. mar n'ho karefemp ket,  
Krouadurez dispar, Mamm da Zalver ar bed ;  
C'houi krouet leun a c'hras gant an Tad Eternel  
Ha choazet da bried gant ar Spered Santel.

2

Dre volziou glaz an Env, en eur veuli Doue.  
War ho zeleddou tan ar Zent hag an Æle  
A zalc'ho da ganan, Rouanez an Envo :  
« Glear d'an Hani zo bet gwerc'h ha mamm war an dro ».

3

Na piou a garfemp ni ! war lein Mene-Kalvar  
E kichen Kroaz Jezuz, mantret gant ar glac'har  
Ho peuz prenet gantan ar bed diouz ar maro  
En eur ginnig d'e Dad e wad hag ho taëro.

4

Na piou a garfemp ni ! Evel ho Mab Jezuz  
Aboue daou vil vla zo, c'houi zo madelezuz  
Evit an dud a boan, a glem, a skuill daëro ;  
Bemde red evit-he ar brasan burzudo.

5

Eun den dall, eun den kamm, nag a dud mac'hagniet,  
Bugale, tud iaouank gant klenvet dizec'het,  
Dilezet gant an dud, a lar d'ac'h ar beden,  
Eur beden ha kerkent ec'h int iac'h ha laouen.

Itron Varia Lazlaün, hon Mamm, hon Patronez,  
Tolet ive warnomp eur lagad a druez.  
Itron Varia Lazlaün, hirie de ho pardon  
Silaouet ar beden a zav euz hon c'halon.

Reit d'imp holl ho pennoz, Reit d'ar vugaligou  
Deut joaüz d ho kwelet. war diou vrec'h o mammou,  
Gras da vezan bemde evel ho mab gwechell  
Hed o bugaleach, koant, zentuz ha zantel.

Desket d'an dud iaouank e kreiz o bokedi  
Hag er joaiou diroll re stank o hunvrei  
'Vel en er ar luc'hed e tremen treo ar bed,  
Iec'hed, madou, galloud, iaouankiz ha gened.

D'an tadou, d'ar mammou, d'ar pennou tiegez,  
E kreiz ankenniou braz, reit sklerijen ha nerz  
Da zalc'hen stard o zud ha heuill ar fe gristen.  
Ma reno e pep ti Jezuz hag a lezen.

Itron Varia Lazlaün, reit d'an dud koz brevet  
Gant ar boan, an anken, ar bloaiou, ar c'hlenved,  
Gras da ziskouez bepred ar skouer vad, ar gwir hent ;  
Gras eun de da vervel evel ma varv ar Zent.

Holl e c'houlomp miret ar vertuioù kristen,  
Difen hep doan na mez Jezuz hag e lezen ;  
Ho karet 'vel hon mamm bemde betek mervel.  
Da c'hortoz kanan d'æ'h kantikou eternal.

NIHIL OBSTAT :  
J.-B. CARLUER,  
*Can. tit. cens.*

LE BIHAN,  
*Recteur.*

Brioci, die 3a Augusti 1921.

IMPRIMATUR :  
Y.-M. LE PENNEC,  
*Vic. gen.*